

An uzulier.

O^{ch}goulén E medi ar paour en tall ho pors
eun tam bara deus ho tors.

pe eur bastel gig divar ho plad,
pe vassin ar iod da grignat *lipad* -

Me zo va chass ho c'hemoc'h ar c'had
pa deuchont d'ar ger ho haffint mad. (1)

— me ne kaff ked din eus kernez vras
pa na pur ar beoïen ar i(e)od glas,
ar pri demeus ar mechou bras.

me ne kaff ket din ve ker an ed
pa ne da seiz skoet peb greunen ed *priz ar c'had. na kaouet lez*
pa ne de seiz skoet peb pikodat— *gant pris sac'hat*
na kaouet lez gant peb sac'hat. (2)

— Roït d'ar paour an allusen
me a tremeno eb tam dam meren.

na d'
— ar pred all te a raffe korvad
a zebfe diou pe tei'r skudellad.

Pa ie an uzulier d'an illis
e chache ar paour var he c'houris,
e c'houlenen
~~hag a houtene~~, ken truezus
eun dinerig en anon Jesus.

— Me ne meus nag arc'hant nag aour
netra e tout da reï d'ar baour.
-evit

An uzulier na klan fatig en eur kavet
ober he testamant en eus c'hoantet.

grit ho testamant pa geret
a pa iaffe da pemp kant skoët.
vel ma leverot e vo groet.

Me meus aze liseliou moan
 laket ar gaera d'am lianan
 vid ma zin brao deus ar bed man.

nag aze zo eur c'hos valin
 sez vla zo o telc'hel ad lin
 a zo manivik evid ho min
 evid mond dan ivern da zevi.

Setu aman fad zo eur verc'h vad
 testament an ivern d'he zad ? (3)

Setu an uzulier maro
 D'he anterramant deued an eb a garo.

Pa ia an uzulier d'an douar
 e lam an diaoul lost ar c'har

nag a lavare dre ma ze
 eman zo din korf ag ine

Pe oa laked bars en illis
 ag en laked var ar varskaon
 eur strak en deus gred he archet
 he ben e mez n'deus digasset :

evid lavaret da dud he kaon
 ... na no ped chent ket evid'han
 e voa ho leski he kreiz an tan.

An uzulier a lavare
 en puns an ivern pa (z)iskene

ma va loskit da vond ér mez
 me a roï an allusen sur bemdez
 ter goec'h ar sizun kalite

~~nag a lavare an Diaoul bras~~

— Souez na rez pa voas e c'hez
 na Breman ne c'hi ked er mez.

— Mar karje bed ma c'hoar Mari
 Reï'an allusen eb goud din
 en devoa savetet ene tri.

ene va mam ene va zad

n'a va ini va eunan
 breman on he leski kreis an tan

*l'usurier de St Yves, à Pleiber-Krist.
 la chanteuse enfant monta sur l'autel
 pour soupeser sa bourse*

Marie Koad, femme d'Yves Keriou,
 dt à Penvern près le Porslan, en Taulé.
 13 juillet 1851.

(1) Ces deux vers sont ajoutés dans l'intervalle qui existait entre la précédente strophe et la suivante.

(2) Ces quatre vers sont ajoutés dans l'intervalle qui existait entre la précédente strophe et la suivante. Le 4ème vers est écrit sur la même ligne , à la suite du 3ème.

(3) La lettre initiale du mot «testament» est-elle d ou t? L'une est écrite sur l'autre.